

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 125. CHOAS EUN AMOUREUS

( follenn 103 )

Mar demezan me birviken  
hag e rin sur mar kavan den.

birviken james mar gallan  
amour mortolloz me ne ran.

enez zo sujet d'an danjer  
a d'ar chagrin d'he dud er ger

birviken james mar gallan  
amour marichall me ne ran.

Enez am dalc'he pad an noz  
da c'hoaza tan er vegin goz.

birviken james mar gallan  
amour kemener me ne ran

Enez zo lem beg e nadoz  
hag a fourfe nezi em c'hoff.

na pa komzot va demezin  
Komzit doc'h eur skrivanier din.

Rag enez gant eun toll pluen  
A chach an arc'hant d'he kichen.

~~~~~

Moris Follezour, 29 févr. 1851

~~~~~